

CHANSON CUPIDON

Var un ton anavezet.

Tostait, tud yaouanq, da glévet ur chanson
Anevez composet var sujet Cupidon,
Ha me a gouto d'ech darn eus an effrejou
A brodu heurvuja ebars er galonou.

Ne ouñ get ens petra dont d'er gomparachi:
N'eo e nep lec'h ha partout goudeoc'h ec'h éri,
Nemet ous an avel, a so oll penetrant,
En so er memes tra etoues an dud yaouanq.

Me zo bet pell amzer e clasq d'ioñal ounta;
Pen deus va suprenez, e meus renget plega,
Au objet a garan a verit gement-se:
N'em bije geuz ebet, m'or bijemp liberte.

Mes allas ! calz a boan am bo da anduri.
Quent n'am bo ar bonneur d'allout e fossedi,
Mes e creis va foanion e teuan da gompren
Etouez ar brassa drein vez ar gaera rosen.

Pa voan o studia, m'em boa bet ur guetel
Digant ur mignon din hac am gare fidel,
Da zioñal va c'halon eus an amourouset,
Pe biqen blijadur n'an bije var ar bed.

Ebars en amzer-ze ne allen get credi
E vije'n amitie capabl d'am areti,
Aac a greis va c'halon me a c'hoarze neuze
Da guement a zouge eaden an amitie.

Brema e velan selér, nespel d'am imprudanc,
Oon foreet da gredi dre va experianc;
Venus ne vañq james da veza trioufant:
Ret eo oboissa, an natur a gommand.

Ma velfes ac'hanon brema, va c'hamarad,
Va c'halon languissant, beuzet va daoulagad,
Ancouñ bet, ganen an avis saluter
A poa bet roet din er guer a Landreguer.

A boan e hall va dorn cundui va fluen,
Va speret so troublat ha carguet a anqen.

Da avis saluter ne vel get eus va speret,
Mes, sionas d'am c'halon, ne meus get e heuillet.

Vel ur c'hareat fleur goloet a lonzou,
Eo carguet va c'halon eus a hnanadou
Chagrin continuel abreuvet em glac'har,
Evel un durzonel pa ve collet e far.

N'en deus var ar bed na ne vezo biqen,
A oufe explia na qenebent compren
Degre an amitie, pa ve parfaitamant
Unisset a galon entre daou zen yaouanq.

Doctoret a Sorbon hac a filosofi,
Rhetoriq, Seminer hac a Dheoloji,
Oll squiet an nature laqet tout e unan
Da ober an dra-ze e ve tout re vian.

Va c'halon re dener n'out get hac en allo
Hep ranna daou anter o clévet ur c'helo:
Lavaret e eus din gant darn va mignouet,
Ema ar goal deodou ec'h ober ur boget.

Da réit din va-unan ha d'am mestrez da choas
Dont d'en em separi pe gaout evit parlaeh
Eur boget o deuz grêt eus a beder fienren:
Chagrin, melancoli, poan-speret hac anqen

Arca teod miseral, ha neo get poent dide
Lelzel pelloc'h en peoc'h hac an tranquille
Au dud yaouanq er vro da rên o yaouanqis,
Ive den em garout ebars en honestis?

Partout elec'h ma zes te laqa an anqen;
Goas out ebars er vro eget na ze ar vocen;
Hac ar c'homzou poezus a roes da hepini
Zo capabl ha laqat ar velf d'en em zebri.

Entre tad ha buqel, etre ar breur, ar c'hoar,
Etre ar priejou te laqa ar glac'har;
Mestrou, domestiqet, qerent ha mignouet,
A greis o blijadur te peus o zeparet.

Cléo ar Speret-Santel o parlant er Scritur,
E vezo mihguet ar goal deod dinatur,
Dre ma laqa malis ha separation
Etre tud a veve ebars en union.

Cléo Sant Yan o parlant en e Apocalyps,
Sant Gregor ha Sant Paol, Doctoret an Ilis,
A lavar en devo ar goal deod da bartach
A leun-ont infernal carget eus a arrach.

Ha c'hui tud curius a dremen vit tud fur,
O clévet goal deodou, c'honi guemer plijadur:
Lennet pis ar Scritur hac e velfot merget
En em rentit coupabl eus ar memes pech'het.

Selaouit Sant Bernard, an abat admirabl,
Pe Sant Louis, Roue Franc, oc'h instrui e vab;
E zifenne outân na rose odianc
Da zroug prezec a zen ebars en e brezaug.

Evit conclusion, deoc'h-ni, tud curius,
Ho pedan assambles gant an teod bilimus,
Da guemer va chanson breman evit reglen:
Sotoc'h evit an den avichou er c'helen.

Qent evit finissa d'an objet a garan,
Dezi ec'h adressin va c'homzou divezan
Rezit fidel d'ho qer, me vezo d'am tûni,
Berviqen goal deodou na ell hor separi.

Ferm evel ur garec er mor ous an tourmant,
Mar bezit din fidel me zisquelé patant
En em garimp bepret hon daou u vir galon,
Despet d'ar goal deodou a rên dre ar c'hanton.

Ar men fondamental demeure an amitie
Hon unisso hon daou dre ar c'hrac Doue,
Speret noñalec'h oc'h eus evit allouet eredi
Ne zeus victor ebet na renqer combatti.

FIN